

**Dizano – Kovesion ar Pitaouer.** Modernnaet eo bet an doare-skriva.  
Bet savet e fin an XIX<sup>ved</sup> kantved.

## Kovesion ar Pitaouer

Ar “Penitant<sup>1</sup>”

Gand eur hlahar vraz em halon,  
Ma zad, on deut d’ho kaved  
D’ober deoh eur govesion  
Deuz va buhez debordet.

An tad kovesour  
Dirollit mad ho chapeled,  
Bezit gwirion penn-da-benn,  
An absolvenn a veritfet  
Mar ho-peus eur gwir anken.

Ar “Penitant”

A-viskoaz on bet eur hanfard,  
Eur merhetaer ar gwasa ;  
Ne oan ‘med eun tammig krennard  
Ma karen kalz o starda.  
Pa welen eur plah koant bennag  
Ma gwad ennon a verve,  
Ma halonig a ree “Tik-Tak”.

An tad kovesour

Ne zanteh mann ouspenn-ze ?

Ar “Penitant”

Eur blijadur deuz ar vrasa  
Em-boa o weled Mari  
Beb noz deuz en em zihwenna,  
Hag o sikour anezi.

An tad kovesour

Gwelloh e vije bet deoh-hu  
Deski ho katekismou,  
C’hoari kornigell ha dotu  
‘Vid dihwenna merhejou.  
Ped hoh-eus-hu c’hoaz dihwennet ?

Ar “Penitant”

Ne oun ket<sup>2</sup> ervad, war ma fe’,

---

<sup>1</sup> Penitant : penedour. (galleg eo “penitant”)

<sup>2</sup> Ne oun ket : ne ouzon ket.

Rag abaoe deg vloaz tremenet  
E heulian ar vicher-ze.

An tad kovesour  
Lirit diwar-benn ar genta.  
Ar "Penitant"  
O ! va zad, me ho tisfi  
Da gaved e-barz ar gêr-mañ  
Eur plah ken tentuz hag hi.  
Nann, biskoaz n'ho-peus ket gwelet  
Eul lagad ken birvidig,  
Eun tammig korv ken brao stummet,  
Eur bale ker manifik,  
Eur begig flamm 'vel eur rozenn,  
Eur zellou lemm ha lirzin,  
He bleo du 'vel eur vouarenn.

An tad kovesour  
Kendalhit beteg ar fin !

Ar "Penitant"  
Deg vloaz 'zo bet da Veurlarjez,  
O ! ya, soñj mad am-eus dalhet !  
E ris ar pehed mignon-ze.

An tad kovesour  
Livirit mad 'vel m'ho-peus greet.

Ar "Penitant"  
'Barz en he zi pa erruis  
E kavis ma dousig koant  
O tilemel krak heh hiviz.

An tad kovesour  
Re evuruz e oah, kliant !

Ar "Penitant"  
Ober a ree van da ouela  
Pa rois eur pok dezi,  
Ha me raktal d'he briata !

An tad kovesour  
Ijin mad d'he honsoli !

Ar "Penitant"  
A-grenn-dost e oa eur gwele.

Warnezañ e oan kouezet.  
Ar rest 'ouozh koulz ha me.

An tad kovesour  
Nann da, ne zivinan ket !

Ar "Penitant"  
Eno seiz gwech e tañveis  
Dioustu ar frouez divennet  
P'hini<sup>3</sup> a gavis mad iskiz !  
An tad kovesour  
Ma mab, brabañsal a rit !

Ar "Penitant"  
Mar ne laran ar wirionez  
Me 'houlenn beza spahet  
'Vel eur porhell pe eur hole !

An tad kovesour  
Pell 'zo ho-peus meritet !

Ar "Penitant"  
Abae ma 'm-eus bet tañvaet  
Eur zoubennig ken karabl<sup>4</sup>  
Em-eus bet atao kendalhet !

An tad kovesour  
Terri a ray deoh, va mab !

Ar "Penitant"  
O ! ya. Santoud a ran dija  
Ez oh eun diviner mad,  
Rag tehel a rankan bremañ  
Pa 'mez lipet diou loaïad !

---

<sup>3</sup> P'hini : fazi yezadur boaz an amzer-ze. An hini.

<sup>4</sup> karabl : ger bet savet gand an oberoru war "kar", "karoud", gand eun dibenn galleg.